

Ar bezhin glas gant Laurence Garcia

Ar bezhin glas, setu eus 'pezh vo kaoz hiziv er gronikenn, war Radio Kerne Naoned. N'eus ket pell zo em eus dizoloet ur vandenn-dreset savet gant Pierre Van Hove ha skrivet gant ur gazetennerez dizalc'h, Inès Léraud anvet « Algues vertes, Histoire interdite ». E-pad daou vloaz he deus enklasket Inès Léraud war an danvez-mañ hag ouzh kalz tud vut he deus kejet... Un afer rividik eo...

BBC seawash / waves

Bep bloaz, etre miz Mae ha miz Gwengolo, e weler tonennoù a vezhin glas war an traezh, a hed arvor Breizh. Pa ne vezont ket dastumet e krazont goude 2 zevezh ha gwenn e teuont da vezañ. Ur c'haz a sav dezho, ur c'haz marvel : an hidrogen sulfur, H₂S. Pa vez analet kalz gant un den ne c'hall ket hemañ c'hwezhañ ken hag e reizhad nervennel a chom seizet. Lazhañ a ra ken buan hag ur c'haz all : kianur.

Met perak ? Perak eo marvet 3 den hag ouzhpenn 40 loen abaoe fin ar bloavezhioù 80 gant ar bezhin-se ?

Setu 'pezh a gont Inès Léraud deomp el levr-se. Displegañ a ra eo bet diskuilhet gant ur medisin Pierre Phillipe e anv hag a labour e ospital Lannuon e oa marvet ur reder gant ar c'haz-se. E 1989 (*mil-nav-c'hant-nav-ha-pevar-ugent*) e oa. Ugent vloaz war-lerc'h, e 2009 e tizoloer marc'h ur medisin-loened ar wech-mañ, war draezhenn Lokmikael-an-Traezh, marvet gant ar bezhin-glas. En e skevent e kaver ur feur uhel ar c'haz H₂S. Dezrannoù pe analisoù ma fell deoc'h a zo goulennet digant Chantal Jouhannot, ministrez an Endro d'ar c'houlz-se. Ar skiantourien a zispleg eo marvel ar bezhin-glas-se 'blam d'an hidrogen sulfur neuze.

Selaouet 'vo diouzthu ouzh ur reportaj graet gant Frañs 24 *pevar-warnugent*, *France 24*, e miz Gouere 2019 : *Reportaj Frañs 3*

Klevet ho peus André Ollivro, prezidant ar gevredigezh « Halte aux marées vertes » hag aotroù Maer Hilion, Mickaël Cosson.

E 2008 e voe kavet daou gi e Hilion, marvet war an draezhenn leun a vezhin glas. Ur c'horf-skejadur a voe graet hag ar medisined a glozas e oa marvet gant ur c'haz pistrius.

Gwashoc'h c'hoazh, ur bloaz goude, Thierry Morfoisse, blenier evit un embregerezh a zastum bezhin-glas a-benn naetaat an traezh, a varvas pa oa o labourat e Binig. Ur gwallzarvoud en e garr-samm a voe evit ar pennoùbras. Analet en doa hidrogen sulfur e-pad

eurvezhioù. E familh, gant sikour kevredigezhioù o deus stourmet e-pad pell a-benn gouzout ar wirionez ha lakaat da anavezout e oa 'blam d'ar c'haz a zeu eus ar bezhin-glas e oa marvet-eñ.

Met eus pelec'h e teu ar bezhin-glas-se ?

Eus an nitratoù produet gant al labourerezh, ha dreist-holl ar saverienmoc'h hag a zo niverus-kenañ e Breizh. Met den erbet ne ra netra. Evel ma oarit marteze eo lobbioù Breizh ar re bouezusañ e Frañs. Displeget eo mattre er vandenn-dreset just a-walc'h. Lennit anezhi 'ta neuze, rak ul labour bras ha resis zo bet graet gant Inès Léraud. Bep bloaz e vez kondaonet Frañs gant al lez-Europa keit ha ma ne raio netra a-benn ezvoudañ (*éradiquer*) ar bezhin-glas deus an Arvor. Hañvoù c'hoazh a chom, hañvoù leun a vezhin-glas ha marse tud a varvo c'hoazh war hon traezhenoù e Breizh, ma ne ra netra an Departamant, ar Rannvro hag ar Stad...